

8N2-3-084

*Plangrescant
Ile de Loaven*

KANTIK

Santez Eliboubana

PE LIBOUBANA

EN ENEZEN LOAVEN



SANT-BRIEG

Ti moulerez Sant Gwilherm, bali Charnon

70

Kantik Santez Eliboubana

PE LIBOUBANA

EN ENEZEN LOAVEN

DISKAN :

*Konèri ha Liboubana,
Ni ho salud bepred gand joa :
Abeurz Doue reit d'imp, bennoz
Ha gras da vond d'ar baradoz.*

Enezenig Loaven, enezen vinniget,
Lar d'in piou a weliz gwech-all-goz o tonet,
O toned deuz Breiz-Veur da gad ann Arvorik
Hag hi ken truezuz o kanan 'n ho bagig ?

Piou a weliz, c'houi lar ? — Me meuz gwelét a bell
Ar zent koz a garet o tond da Vreiz-Izel ;
Kanan rent truezuz, o kouitaat ho bro,
Evel ma kanomp-ni ofis ar re varo.

Kanan rent truezuz, war gwacho ar mor braz,
O laret kenavo evit biken ziouaz !
Ha da Vreiz-Veur, ho bro, ha d'iliz ho faroz,
D'ifiz ho badeiant ha berred ho zud koz.

Joazú braz e kanent oc'h arriet en 'od,
Hag o-rei d'an douar eur pok gant ho diou jod.
« Te vo breman hon bro, ô Breiz-Izel ! » eme.
— Bro ar zent zo dre-oll, lec'h ma karont Doue.

En ho zouez oa Modez (1) ha Briag (2) ha Tual
Seva (3) ha Koupaia (4) ha kalz kalz a re-all,
Ha Sent mad Plouvouskan, ar zent a garomp-ni ;
Santez Liboubana hag he mab Koneri.

Koupaia el Langoat a adzavaz he c'her,
Ha Tual a deuaz d'Eskop da Landreger ;
Santez Liboubana gant he mab Koneri,
War douar Plouvouskan, a rez ive ho zi.

« Kers da vro Plouvouskan, ma hinderv Koneri,
« Eno te vo karet evel ne zo hini ;
« Pa glevin — me Tual — da gloe'h du-hont o son
« E-mo-sonj-ae-hanout, ha-sonj-mad-em-c'halon, »

Eur wech da nebeutan, eur wech ebarz ar bla.
E ti rede Tual da welet Koupaia ;
Ha d'enezen Loaven e teue Koneri
Da dremen eun devez, gant he vam, en he zi.

(1) Sant Vodez, patron Lanvod-z

(2) Sant Briag, patron Bourvriag.

(3) Santez Seva, c'hoar Sant Tual.

(4) Santez Koupaia, mam Sant Tual ha patronnez
Langoat.

Parzeg kant la zo boue, ha Koneri, bep bla.
A zo deut da welet he vam Liboubana.
Hirie Liboubana a-ia, d'he zro ive,
Da welet Koneri, elec'h ma man he ve.

« Deut gan-in, ma mam vad, » neuz laret Koneri,
« Deut beteg Iliz Pêr, deut gan-in da bedi :
« An dud en Plouvouskan ho kar a greiz kalon,
« Deut, ni bedo vit-he, en-pad ar mision. »

C'houi zo bet eur vam vad, Santez Liboubana,
Evid-omp-ni, mammo, goulet hep eana,
Goulet nerz ha dousder, ma vo hon bugale.
Fidel d'ho zud hepred ha fidél da Doue.


Kalz aman a gouita ho broig Breiz-Izel :
Da c'honed ho bara, e renkont mond pell pell.
Gret d'he distrei d'ar ger, ô santez vinniget,
Dinam ha didamal, evel gwir Vretoned.

Reit avel vad bemde da vag an nocherrien,
Ma teint bemde d'ar ger pinvidig ha lacuen ;
Ha da Loaven, bep bla, gant ho bag, hi deuo
Da dremen an dud vad a ia d'ho pardonio.

Al labourer ive ho kar, Liboubana,
Goulet bennoz Doue war he barko bep bla ;
Ha Doue a roio ho bara pemdeiek
D'an dud vad a labour devot ha kalonek.

O Sent koz Plouvouskan, dalc'het stard 'n hon
Ha Fe ha Karante ar gwir Rilijion ; [c'halon
Ni fell d'imh, evel-d'hoc'h, goude ar vue-man,
Kavet er baradoz bue da diskouzan.

Kantik groel gant An O. PON,
Person Plouvouskan.



KANTIK

ENN ENOR

DA ZANT KONERI

War don : *Pedenn al labourer d'ar Werchez.*

Zant Koneri, mignon Doue,
Otro zant Koneri binniget !
Ouzimp oll kemeret, true,
Zilaouet pedenn ho Pretoned :

DISKAN

*Eur sell war ar paour keas labourer,
D'ar martolod ive ho pennoz,
D'hon bugale ha d'ar pec'her,
D'ar pec'her paour hent ar baradoz. (bis).*

Al labourer, noz ha beure,
En euz poan ha leun a zienez,
Enn he drubuillou kouls aoude,
N'ankoueo biken ho madelez.
Groet ma vo ed 'nn 'he zouaro ;
Dreist oll, diwallet a ve kollet,
Goude eur vue ken chouëro,
Al labourer en euz ho karet !

Duont pell pell war ar mor braz,
Leviet ho bag d'hon martelodet :
Ar mor a zo riskuz ziouaz !
Aliez aman e vemp nec'het...
Miret-hon zud a wal amzer ;
Zant Koneri, mar hon zilaouet,
Digaset heb dale dar ger,
Ar martolod en euz ho pedet !

Zant mad, c'houi 'zo trugarezuz,
Roet d'imp c'hoaz euz mennad hirie :
Skouer fall a zo pec'hed euzuz,
Pelleet diout-han hon bugale ;
N'oullomp ket e kolfent ar Fe,
Gwell ve d'he mervel, Zant binniget !
Diwallet 'ta, enn han Doue,
Ar vugale a zo d'hae'h gwestet.

Kant gwech em emp, dre ar pec'het,
Diamzavet Jezuz hon mœstr mad ;
Groet ma vefomp ken glac'haret,
Ma welo dourek hon daoulagad.
Ha war ann heur deuz ar maro,
Dirag hon barner, zant binniget.
Pedet Doue ma pardono
Ar pec'her paour *en eus ho pedet.*



KANTIK

Relego zant Koneri

War don : *Bue an otro Zant Koneri*, pe eur *Werg-*
all euz levr Barzas Breiz (p. IX).

DISKAN

*Zant Koneri, zant evurus,
Ouz mœuz Doue bepred sentuz,
Pedet ma virfomp he lezen,
Ha ma refomp gwir binijen.*

O penn zantel, pa ho kwelan,
E teu ma c'halon da domman ;
Ann dour a zeu em daoulagad,
Pa welan penn ma fatron mad.

Aboue ouspenn daouzek kant vla,
Ma hoc'h zavet eus ar be-ma,
Enn ho kichen, penn binniget,
Nag a zaero zo bet skuillet !

Aman dirag penni hon zant braz,
Evid-on ma mamm a bedaz ;
War ma daoulin aman hirie,
Vit ma mamm baour me bed ive.

Aman lere d'in aliez :
« Ped zant Koneri, bugel kez, »
O ! me garje, ma mammik vad,
Bean zentet ouz-oc'h dalc'h-mad !

Kalz a vammo-all glac'haret
Dirazoc'h zo bet o laret ;
« Pa eo maro ma mab breman,
« Me a garfe mervel aman ! »

Dira-z-hoc'h ar vugalego
A bed ive vit ho mamo.
Pedet evit ar vugale,
Ma chommo ho mammo gant-he.

Klevet hoc'h euz ar paourik kez,
O laret aman aliéz :

« Ma zad a zo et er mor don ! »

« Zant Koneri vo ma fatron ! »

Dindan ho penn, zant binniget,
Nag a hini zo tremenet,
Tud a vor ha labourerien.
Tud a vrezel ha belein !

Tud a ped bro hag a bep stad
Ho deve aman ho mennad.
Zant Koneri lemm digant-he
Terjen ar c'horf hag ann ine.

Labourerien,, martolodet
A weler aman daoulinet :
Leret d'in hag en zo hini
Gwelloc'h evit zant Koneri ?

Ni a dei, evel hon zud koz,
Da gavet patron hon farroz :
Ann neb hen pedo mad bemde
A vezo fur pad he vue.

Ni a dougo he benn gant joa
De ar pardon war hon diou skoa,
D'ann Ee ive hen a zougo
Hor ine goude ar maro.

Pegen kaer ez eo pa dremen,
Gant he gurunen aour melen,
Penn hon zant zo er baradoz
O tiwall anomp de ha noz !

« Eunn tenzor eo evit ar vro ! »
Penn zand Koneri ni viro,
Vit ma pelleo diouz hon zouez
Brezel ha bosen ha kernez.

Zant Plouvouskan, zant Koneri,
C'houi vezo bepred hon zant-ni ;
Euz krec'h ann Ee reit ho pennoz
Da dud Plouvouskan, ho parroz.

*Neb a gano a c'hantik-man gant doujans
Doue, a c'hono 40 devez induljanso.*

Nihil obsta :

IMPRIMATUR :

Brioci, die 21^a augusti 1919.

Y.-M. LE PENNEC,
Vic. gen.

Sant-Brieg. - Ti moulerez Sant-Gwilherm.